

Martin Pirre : Gwiskri 1868 – Gourin 1935). Beleg e oa.
Bet embannet e 1900.

Modernnaet eo bet an doare skriva. Sur ez eus eur bern viou-koukoug ‘barz a skrid bet moulllet. Eur bern faziou kemmaduriou a zo.

Pardon Skaer

An amzer ‘zo bet tomm, ar zegal hag ar herh
Evid gouel Sant Alen ‘zo klozet e peb leh ;
Skourret eo ar freillou da hortoz an eost du¹ ;
E Pardon Sant Alen e vo tud a bep tu.

« Daou vaout ha pemp tok gloan, mouchoueriou ha butun
‘Vo ‘hortoz o ferhenn e bourh Skaer ‘benn dilun ;
Ar re o-deus kezeg, dihodet o morzad²
A hall da Bontigou o has da haloupad. »

Setu ar pezh a glev, e Gwiskri da vintin,
Ar re ‘chom da zelaou Laport Koz war e vin³.

Hey ! Boulben, Nihuellou, Bomin Bin hag Haskoad,
Stardet ho prageier, soavonet mad ho pezh troad,
Ha diskouezit c’hoaz eur wech d’ar hournerien ganfard
E kaver e Gwiskri tud euz gouenn Yann Toupard !
Ha c’hwi, paotred Zaone⁴, kaset ho troterien
Da ziskouez ‘benn arhoaz da Vikel Klemerien
A zo en on parrez, d’an drot ha d’ar pevar-zroad,
Kezeg deg gwech souldpoh⁵ evid *Loig Kergoad*.

AL LUN VINTIN

Kentiz hag ar vintin, war an oll hentchou,
Ne gaver nemed tud o vond a-vannajou⁶
Da wl’ d e bourh Skaer ‘gredo mond da hoari
Gand ar re ez eo eet ar maout e Par’n⁷ Gwiskri ?

Kerkent hag ar zao-heol, oll ruiou Skaer a gorn
Gand oeñ-hag-oeñ⁸ Boulig ha bombard Dal Rosporn.
Ar merhed a lugern gand o holierou braz.
Ar boatred ‘n em vodet en-dro d’ar *Mil-ha-kaz* ;
Mez ne vern pegen braz eo o hoant da zañsal
Ha da ziskouez d’an oll pegiz ‘ouezont bragal,
Red ‘vo dezo gortoz fin ar haloupadeg

¹ du : an ed-du.

² morzad : morzed.

³ e vin : e vèn.

⁴ Zaone : Sant Mandé.

⁵ souldpoh : a gerz buannoh

⁶ a-vannajou : a-vandennnou.

⁷ Par’n : Pardon.

⁸ oeñ-hag-oeñ : son ar biniou.

Evid hijal o hwenn⁹ dirag ti Rodalleg.
E korn ti Yann Derrien, e-pad an amzer-ze,
Kristof 'vount 'n e zakoud¹⁰ meur a droiad kafe.
Ha kalz paotred yaouank, flakeet¹¹ dezo o yalh,
'Vo gwelet 'raog kreisteiz o kestral eur bannah.

I AR HALOUPADEG

Mez setu unneg eur ! poent eo, Fañch-Loeiz Robin,,
Ober an dro d'ar vourh gand ho paz taboulin.
-Peh ! 'ta¹², eet oh bouzar ? Ema 'barz an Neac'h-Ru,
Ha d'ar haloupadeg, mond a reer diohtu.
N'ho-peus ket gwelet Dupont, gand e stleugou melen,
O vond dre ma helle 'hed-ha-hed gand an hent ?
Hennez a vez beb bloaz o tilaask ar hezeg...
Mar fell deom gwel'd an traou, mall eo deom 'ta redeg !

Trizeg jao moan ha prim, war ar memez linenn,
Da hortoz an taol fouet a wint, a hij o fenn.
« *Guioh*¹³ ! » a lavar ar Mêr, ha kentiz pep toucher,
E benn war houe e jao, a zav e-barz an êr.
E-kreiz ar boultrenn zu a nij diwar an hent
Ne glever en-dro deoh 'med hopal a-bouez-penn :
« Dalh 'ta ! Bourhiz Gwiskri ! Dalh 'ta, Herve Kerikel ! »
'N eur wel'd e fillor Job e-mesk an doucherien,
Alen Goz Kerbastiou en-deus kollet mik e benn :
E gorn pochet-ridet¹⁴, e voest tont, e zirenn,
Oll e rikou butun a gouez war an dachenn.
« Va fillor Job, emezañ, hennez n'eus ket e bar ;
Klaoustre gand ne vern piou 'vo ar hentañ er par¹⁵ ! »
« Arsa, paour-kêz Alen, gand ho fillor grit peoh !
Ar jao 'zo dindannañ 'zo gagnoh 'vid eur vuoh,
Ha gand e ziouharr 'dreñv, mar ne dap rah an hent...
Kleved a reom hopal : « *Erru int ! Erru int !*
Dalh 'ta ! Bourhiz Gwiskri ! Dalh 'ta, Mikel Kergwing ! »
'N eur wel'd jao ruz *Zaone* o sevel e bevar droad,
O ! Gwerhez ! 'lar Alen, dalv ket 'r boan deom huesad¹⁶ !
Hennez 'vo degouezet e-kreiz lann ar *Hleuniou*
'Raog ma vo gwelet Job 'war beg krog¹⁷ *Pontigou* !
Fallaad a reom, paotred, koz-mad on, emezañ,
Ha jao 'bed euz leh all n'am-eus gwel't ar hentañ.
Petar ne laro ket paotred ar gazetou¹⁸ ?

⁹ hijal o hwenn : troet deuz ar galleg.

¹⁰ 'n e zakoud : ? 'n e gorv (?)

¹¹ flakeet : skañvaet.

¹² Peh 'ta ! : Petra 'ta ?

¹³ Guioh : war-raog !

¹⁴ E gorn pochet-ridet : e gorn-butun, e benn roufennet (?)

¹⁵ par : pal.

¹⁶ huesad : ? gounid.

¹⁷ krog : kreh.

¹⁸ ar gazetou : ar helaoennou.

Gand eur jao euz Gwiskri 'ma eet maout Pontigou !
 « 'N em jalet ket, Alen, eme Loeiz Kergoaler,
 Ar jao-ze, paour-kêz den, 'zo ginidig euz Skaer. »
 « Mad eo an traou neuze, deom buhan , bugale,
 Da baea eul lomm jistr da baotr Bourhiz Zaone. »
 « Dirag Kroaz-ar-Misi ne weler nemed tud ;
 Torret eo an diousskouarn gand an trouz, an tabut,
 Ha kaer 'n-eus Alen goz, n'hell ket treuzi ar bobl,
 Red mad eo dezañ 'ta gortoz e fillor Job.
 « Pegiz, eme Alen, ez oh keit-se war-lerh ? »
 « Da *Vijou*, eme Job, Loeiz en-deus roet re gerh,
 Ha diohtu 'n eur zebblas *Bijou* 'n-eus kollet e lañs !
 Pan 'vid-se eñ ve bet ar hentañ pe daol chañs !
 -Den ebed ne ray goap euz jao fillor Alen,
 Ha *Bijou* 'yay d'ar gêr, eru zeizenn ouz e benn :
 Mez 'n eur zegouezoud en ti, Job 'laro d'ar paotr-saout :
 « Pan 'vid ho tokad kerh, ganeom 've deut ar maout. »

Pa ziskenn paotr Zaone, d'an traoñ gand an Neh-ru',
 Ne oar ket euz piou pres, kleved a ra a bep tu :
 Demad, kenderv Bourhiz ! demad, kenderv Zaone !
 Rag kenderv 'vez d'an oll hirio e-pad an de'

KREISTEIZ

Mez e-kreiz ar safar, ar hloh a zav e vouez,
 An *Anjelus* a zo e tour koz ar barrez,
 Hag an dud a-vêz-bro, ken boemet touchantig,
 A zo souezet-braz ne glevont mui eur grik.
 N'ez eus en-dro dezo 'med ar *chiminaoued*
 Hag a zalh war o fenn ho zammou tok krignet.
 Pa zon an *Anjelus*, krsitenien Breiz-Izel
 Da Rouanez an Neñv a gas salud an êl ,
 Ankouad 'reont an douar 'vid sevel o spered
 'Trezeg ar Werhez vad, o mamm vuia-garet ;
 Ha gwelet 'vo henoze, e-kreiz eun tabut braz,
 Paotred Skaer ha Gwiskri oh ober sin ar groaz,
 Rag o hortoz ma vo gand o mignoned vezo
 Lared an Anjelus 'vid distrei d'o feg-bleo¹⁹.

E ti braz *Kersuleg*, e hini *Rodalleg*,
 'Vid an tokou moull-hir deut euz hent Bannaleg,
 Ha gand o mouez sklintin ma yefeh da Bariz,
 Gounid 'refeh eru maout disanv²⁰ euz hini Bourhiz !
 « Degas eun droiad all d'am henderv Yun ha me !
 Par 'n Skaer, eme Kaoutin, ne zegouez ket bemde',
 Ha 'giz 'lare touchant Joz da baotred Gwiskri :
 « *Peh ! 'ta, bastagnez ! chiou, ma par'n braz ganom-ni !* »²¹

¹⁹ 'vid distrei d'o feg-bleo : ? (e galleg : pour retourner à leur coup de chignon. ?)

²⁰ disanv : kalz gwelloc'h ouz hini...

Laoskom an eontr Kaoutin ha hopal 'pez a gar,
Ha da lonka 'n e êz e hanter-demi-kar²²,
Kenavo, Joz Gorvan, a lar paotred Gwiskri,
Mond a reom, rag diohtu e yey an traou na c'hri²³ !

II

AR GOURENOU

Tostaad a ra diou eur, re striz eo ar ruiou
'Vid degemer an dud deut da wel'd ar gourenou.
Laosket, Fañch Loeiz Robin, lasoket ho krampouez lêz.
Henez, da vare koan, c'hwi o debro 'n o êz.
Deuit gand ho taboulin founnuz war ar blasenn,
Hirnez en-deus ar maout da vond da Stang-Aodren.
Gwel'd a reer o vranskel, e skourr euz ar helh braz,
Butun ha tokeier, mouchoueriou ruz ha glaz,
Hag en traoñ gand ar ru, 'trezeg prad Stang-Aodren,
Oll an dud a haloup da heul ar zonerien.
Kaer en-deus Beuzig-Kamm, kaer en-deus lakaad poan,
Hag hijal e droad-fouet, den ebed ne lak van !
Mar n'en-deus nemetañ 'giz "komiser polis",
En-dro d'ar hourenerien ne vo ket pikol lis !

Setu Beg-e-dok ! gwaz d'an dud divergont !
Rag dre gaer pe dre heg, a-dreuz e ranker mond !
'Tal ar helh hag ar maout ne chom 'med ar Mêr
Hag ar wazed choazet en-dro da barrez Skaer.
Evid gweled pisol, ar grenn-baotred a bign,
Ha tro-ha-tro d'ar prad, strakal 'ra ar sapin :
E prad Youn Rodalleg, a-raog ma'z ey an erh,
*Skilibidig*²⁴ a gavo ouspenn eur bodig seh.

Hey ! Aotrou *Rodalleg*, bremañ eun tamm muzik
E-pad ma tiskuizo *Dal Rosporn* ha *Boulig* !
Diskouezit hoh-eus kavet tud hag a oar c'hoari
Gand "*c'hwitallegou kouevr*" koulz hag e bourh Gwiskri.
Kerkent paotred boueh Skaer a dap o benvijou !
Afe aoul !²⁵ 'lar paotr Torc'h, selaou 'ta... orglejou²⁶ !
O ! biskoaz kemend-all n'am-esu gwel't em buhez !
E bro *Frañs*, par da Skaer n'ez eus ket eur barrez.

Digor 'ra ar gourenou... Postig Koz, « giz beb bla²⁷,
A ziskorog euz ar helh an tamm butun kenta ;

²¹ « Peh ! 'ta, bastagnez ! chiou, ma par'n braz ganom-ni ! » : e galleg : Quoi donc ! Bastagnez ! aujourd'hui c'est la grande fête de chez nous !

©: notenn gand an oberour : « Peh ! 'ta, bastagnez ! chiou, ma par'n braz ganom-ni ! » est un juron tellement usité à Scaer, que les Guiscrivites ne désignent souvent leurs voisins que par le mot Bastagnés.

²² e hanter-demi-kar : sa part du demi quart.

²³ an traou na c'hri : e galleg : ça va chauffer là-bas.

²⁴ Skilibidig : ano eur glaskerez-vara euz Skaer.

²⁵ Afe aoul ! : ? "Kurun !"

²⁶ orglejou orglaou (orglez).

²⁷ bla : bloaz.

E dok en e zorn kleiz hag e vreh dehou savet,
Ober 'ra tro al lis, ha den n'en-deus kavet
'Vid lared : « chom en o zao, Postig, ha me 'ya deoh ! »
Red eo boud, m'hen argas ! dihelp²⁸ 'giz bleiz Koad-Loc'hr
'Vid kregi e Postig, gwechall enor ar vro,
Ken doujet 'n e amzer gand gourenerien an dro.
Hervez ar barz Brizeug, an hini 'n-eus kanet,
Gand kemend a zudi, gizioù ar Vretoned,
Ne gaver ket er vro, e-mesk ar hourenerien
Tud evid kilbenni ouz Postig ha Kristen.
Ne oa 'med paotr *Gwiskri*, lesanvet *Toupard Braz*,
'Vid lakaad war o hein roudennou ar yeot glaz.

Ema ar mouchoueriou oh ober tro al lis :
Tapet ho fouet, Beuzig, founnuz eun tamm polis !
Grit d'ar re a zo 'raog daoulina war ar prad,
E-giz-se re 'zo 'dreñv a welo pep krogad.
Lod a stank o dioukouarn, ne gelver en-dro deoh
'Med : « *Chom en o zao*²⁹, *paotr Youn ! Chom 'n o zao paotr Kristoc'h !*
Chom 'n o zao, paotr Gwiskri ! Chom en o zao, paotr Pont-Aven !
Distroit gand ho mouchour, rag kavet 'peus ho ten ! »
Da biou e yet, *Kristoc'h ?* Fidou³⁰ ! n'ouzon ket,
Eur pikol penn en-deus, euz *Gwiskri* eo, me 'gred ;
Lopez a reer anezañ, taol-chañs eur sinori³¹,
Rag da rei lesanoiou n'eus ket 'giz re *Wiskri* ;
Med mar n'eus nemed nerz, e-giz am-eus klevet,
Stard e vo dezañ c'hoari euz eur gourenner triket³²,
Red eo dezañ boud kaled, e-giz eur maout-presour³³,
Mar ne bleg e ziouharr dindan va hliked skourr³⁴,
E-kerzi an deg krogad n'ez eus nemed unan
Hag a ra plijadur da vraz ha da vihan :
Tro-ha-tro din gouzoud, Paotr *Kristoc'h* a hwilgamm³⁵,
Mez 'giz eur marh meliner pleget dindan e zamm,
Lopez a skrign e zent hag a wask brusk *Kristoc'h*.
Red eo, eme ar Mêr, o disparti pelloh !
Kentiz an daou hourenner, ken prest da houlen dour³⁶,
A bella ezu al lis gand o hanter-mouchour³⁷.
-Fidoupenn³⁸ ! 'Iar Lopez, *Kristoc'h* 'zo eul lapous ;
Biskoaz n'm-euz kroget e den 'bed ken lipous ;
Biken 'm-ize kredet 'ao eun askell-grohenn
'Vid kaoud kemend a reuz e-barz eur hrog gouren.
Biskoaz am-eus gourenet gand Lagadeg ar Zent,

²⁸ dihelp : ? marlonk.

²⁹ Chom en o zao : chom en da zao.

³⁰ Fidou : Feiz Doue.

³¹ sinori : lesano.

³² triket : pleustret.(itriket).

³³ eur maout-presour : eun treust-presouer.

³⁴ va hliked skourr : ? 'va zaol-biz troad.

³⁵ hwilgamm : c'hwilgamma (?) : plega da displega.

³⁶ da houlen dour : da baouez gand ar hrogad.

³⁷ o hanter-mouchour : priz (gounid) ar mouchouar.

³⁸ Fidoupenn : Feiz Doue.

N'am-eus ket santet c'hoaz va roched ken war stenn !
N'in ket d'ar gêr alkent heb kaoud eun dra bennag ;
Mar n'am-eus tok gloan, d'ar gourenou me 'lar *flak* !

War-lerh ar mouchoueriou, an tokou 'ra an dro,
Gwel'd a reer o sevel gourenerien vraz ar vro :
Paotr Meill-Pont, Guegan Braz, Youn Hervet, Yann Naelou,
Boulben, Bomin Bihan, Haskoad ha Nihuellou.
Re Skaer, par ma hellont, a veul o henvroiz
Rag ma'z int bet galvet da houren da Bariz,
Ha m'o-deus diskouezet ne oa e bro ebed
Da zistag deoh eul lamm lapoused ken triket³⁹,
Re Wiskri, d'an tu all, a zav o mouez ivez
Hag a lar e kaver ohpenn deg 'n o farrez
Hag a zo 'vid c'hoari, ar hliked skourr ha sonn⁴⁰,
Euz Naelou hag Hervet, Guegan ha paotr Meill-Pont,
E-pad ma tiwiskont o jilet⁴¹, o chupenn,
Lopez war e goañze a grignn e damm perenn.
- C'hoari 'walh am-eus, emezañ, d'ober c'hoaz eur hrogad ;
Mez chom 'ran da wel'd Loeiz o rei e daol biz-troad.
Mar n'ez a ket eun tok da Gartel Sant-Tudal,
Ar maout a yey ganim, pe 'vo ket mad ar stal.
- An Tokou Moullou-hir, oll an dud a-vêz bro
A heul ar hourenerien kerkoulz ar re en-dro.
Gand gourenerien Gwiskri, re ar Morbin⁴² a du :
Gourenerien parrez Skaer o-deus evito Kerjegu,
Ha mar n'o-deus gajou⁴³, eur hoz pezig argant,
Deut euz yalh Kerjegu 'rey vad dezo 'vid koan.

« Paotred Skaer a zo guein⁴⁴, eme Jozeb Merdi,
Mez traou 'walh 'deus d'ober gand gourenerien Gwiskri.
Ohpenn tregont vloaz 'zo e welan ar gourou⁴⁵,
Ha biskoaz n'am-eus c'hoaz gwel't ken brao krogadou. »

Troad oh troad, penn oh penn, tal oh tal, fri oh fri,
Pevar gourener parrez Skaer ha pevar gourener Gwiskri,
E-barz an hopadeg a zav euz a bep tu,
Evid gounid eun tok 'glask o hroz hag o zu⁴⁶.
Dindan seuliou o zreid ar yeot a vo flastret
'Raog ma welim eun tok o vond a du ebed.
Pa bleg unan outo, pa gouez war an dachenn,
Ne glever 'med : « lamm eo ! – N'e' ket lamm, kostien⁴⁷ ! »
Ma'z eo unan euz Skaer, paotred Gwiskri, kentiz,

³⁹ eul lamm lapoused ken triket : gourenerien ken mad.

⁴⁰ ar hliked skourr ha sonn : eun taol biz-troad en êr ha reiz.

⁴¹ jilet : jiletenn.

⁴² Morbin : Morbihan.

⁴³ gajou : kred.

⁴⁴ guein (bet skrivet evel er skrid orin) : skañv ha kreñv (hervez ar skrid e galleg).

⁴⁵ gourou : gourenou.

⁴⁶ glask o hroz hag o zu : 'glask kregi er gourener all, ha gounid eun tok.

⁴⁷ kostien : bet skrivet evel-se er skrid orin. Hervez ar skrid galleg e talvezfe kement ha "kouezet eo war e gostez".

Daoust da *Veuzig Kamm*, en eru vond 'barz al lis,
 A zav war e ziouskoaz an hini eo deut 'benn
 Da lakaad e gonsort e gein war an dachenn.
 Mez oll re Skaer a skout⁴⁸ : « *N'e' ket lamm ! n'e' ket lamm !*
Mar zo yeot euz e gov, euz e gein n'en-deus tamm ! »
 Mez pa gouez paotr Gwiskri, re Skaer a hop : « *Lamm eo !*
Henez 'vad ; Bastagnez, 'zo bet distaget brao ! »
 Ohpenn kant en em vountont e-mesk ar hournerien,
 'Pad ma hop re Gwiskri : « *N'e' ket lamm ! kostien !* »
 Evid lakaad ar peoh, ar Mêr hag e wazed
 O-deus bet gand Doue oll ar furnez 'zo red.
 Kement-mañ, marteze, a vo kavet iskiz :
 Hirio an deiz e Skaer kaoud a reer c'hoaz justis !
 Ha peb gourener 'n em denn 'terzeg e vignoned,
 'Ne eur lared 'ma eüruz gand ar pezh en-deus bet.

- Setu ar hrogad braz... ar maout a ra an dro...
 Krog er stag⁴⁹, Guegan Braz gand e droatad baro
 A houlenne ne vern piou ezu Gwiskri hag ar Faout
 Evid c'hoari gantañ war "*pegad ar maout*"⁵⁰.
 -Mar ve bet Youn Hervet, Duval pe Yann Naelou
 E ve bet krog er stag, eme Loeiz Nihuellou.
 Krenet 'm-ize taol chañs 'raog lared « *Chom 'n ho sao !* »
 Mez Guegan, me 'ged 'walh, ne vern pege kreñv eo,
 Mar n'eus na houarn na dir e-giz askorn morzad⁵¹
 Ne chomo ket 'n e zao àr)lerh va zaol biz-troad.
 « *Chom en ho sao*⁵², *Guegan Braz, chom 'n ho sao, me 'ya deoh !* »
 -A ! *bastagn !* Guegan Braz, eme Youn Penn-Load-Loc'h.
 Kavet 'pesu ho ten ! Gand ho pouez daou-hant liour⁵³
 E baskul⁵⁴ ar Veil-Ne, c'hwi hen dalho e skourr,
 Mez 'n eur hrogad gouren, 'giz ar roñfl Goliat,
 Gand ho konsort bihan steuziet e vefeh moarvad ! »
 -Oll an dud 'zo souezet o weled Nihuellou,
 Joz Gorvan, Yann Jaffre, Loeiz Klec'h, Yann Nivinou,
 Korantin ha Yann Rest, divennourien bourh Skaer,
 Ne laront mui eur grik, o beg 'chom digor kaer.
 Joz Kersuleg a lar, e-giz 'tao heb c'hoarzin :
 « Eur hrogad, paotred paour, '*tre sparfell ha drask vin*⁵⁵ ! »
 A-raog kemer o hrog, ober 'reont sin ar groaz.
 A ! eme Albert Beg, krena 'ra Guegan Braz.
 Euz e gonsort yaouank n'en-deus 'med eur flahad,
 Mez mond a ra 'tao 'dreñv gand aon euz e viz-troad !
 Paotred Gwiskri a skout, ha re Skaer a respont :
 « *Dalh 'ta, Loeiz Nihuellou ; dalh 'ta, marh braz Meill-Pont !* »

⁴⁸ skout : a huch.

⁴⁹ stag : fun.

⁵⁰ Evid c'hoari gantañ war "*pegad ar maout*" : êsead tapoud ar maout digantañ.

⁵¹ morzad : morzed.

⁵² *Chom en ho sao* : kememeka a ra ar gour "unan" gand an hini "liez".

⁵³ liour : lur.

⁵⁴ E baskul : galleg (eur fazi kemmadur a zo : e paskul), e wint.

⁵⁵ drask vin : drask vihan : milhwid.

En-dro da barrez Skaer, hini ne gavo kri
Na pa yefe hirio ar maout gand re Gwiskri,
Rag eur blijadur eo gwel'd eur paotr ugent vloaz
O lakaad war e gein eun ogr⁵⁶ 'giz Guegan Braz ;
Ohpenn, war an tokou, Yann Naelou hag Hervet
O-deus diskouezet d'an oll 'oant paotred vad bepred.
Plomm e-giz eur post kleud, Loeiz a glask gand e droad
Luzia seul Guegan Braz daoubleget 'uz d'ar prad.
Pe 'kred en-deus kavet warnezañ 'hed e harr,
Gand herr eun tamm moutad⁵⁷ a zav euz an douar.
Tostait 'ta Guegan Braz, a hoper tro-ha-tro,
Grit eun tamm sao d'ho kein, diskouezet liou ho paro !
Pa'z eo skuiz Guegan Braz o tenna d'an tu dreñv,
Hey ! 'lar Moris Bodet, touchant e yey d'an traoñ !
Ne oa ket gand Moris e her peurlavaret
Pa weler Guegan Braz war e gein astennet.

Skañv, dibill ha seven e-giz eul logodenn,`
Heb rogentez ebed, Nihuellou 'zav e benn.
Ar Mêr hg e wazed, an Aotrou Kerjegu,
Guegan Braz e-unan a ro dezañ diohtu
Eun dornad karantez evid diskouez d'an oll
N'o-deus ket kasoni petra bennag 'deus koll.
Guegan ha Nihuellou, 'raog mond 'mêz euz ar prad
A stoko o gwerenn e-giz daou vignon mad,
Ha maoutig Stank-Aodren, e gwerniou Sant-Tudal,
A beuro 'benn arhoaz heb tourtal ar re all.

'Raog dilezel bourh Skaer, ar re 'gar ar biniou,
'Vid displeg o diouharr, 'ra eun droiad pe diou.
Gwaz-a-ze d'ar merhed, gwisket e mod Gwiskri
'Vo gwel't e-kreiz ar fest o sevel beg o fri !
Diskouezet 'vint gand ar biz, 'benn disul 'n o farrez,
Ha gortoz raint o zro 'vid dougen ar Werhez !
N'hellont fichal o zroad nemed en eureujou
Heb boud lakaet e rank ar merhed eet droziou⁵⁸.
Setu perag eta, e Gwiskri da Bar 'n Per⁵⁹,
Ne vefe ket gwel't fest paneved merhed Skaer.
Kement-se ne vir ket euz re Skaer da gredi
Eo bemdez o merhed ken fur ha re Wiskri,
Ha gwall-fall 'vo an traou gand Kaoutin Kerbastion
Mar ya d'ober e choaz en tu all d'ar *Hleuniou*.

Oll an dud ranket mad, ar re 'gar o repoz,
A gemer hent ar gêr a-raog toullig-an-noz⁶⁰ :
Ne weler en taverniou o ruzal ha lipad,

⁵⁶ ogr ramz.

⁵⁷ moutad : mouded.

⁵⁸ droziou : diskianti a reont.

⁵⁹ da Bar 'n Per : da vodadeg Sant-Per

⁶⁰ a-raog toullig-an-noz : a-raog ma teuio an noz.

‘Med ar re ‘zo boazet da gousked el lennad,
Ha c’hoaz d’ar meurz vintin, pa zegouezont er gêr,
Keuz o-deus aliez boud re zaleet e Skaer.

Betag ar Pardon all, e peb leh ‘vo klevet,
Par da Skaer ha Gwiskri n’eus diou barrez ebed,
Hag er hentañ brezel, *Gwillou*⁶¹ ray sellou du
Mar wel Skaer ha Gwiskri o-diou er memez tu !

Kerlabour, d’an 29 a viz Gwengolo 1889.

⁶¹ *Gwillou* :Roue ar Prus e-noa gounezet brezel 1870.